

AR WIRIONEZ

Dédiée à M. Charles Notiel de LesquerneC

3^{me} ÉDITION

Schilaout ma ali, paour ha pinvidik :
Ar votadek, pet sonj, ne-ket eur c'hoariel
D'ar c'houlz-se e weler a Gaou e rodeel
Gand eur ialc'h enn he zorn, digaset gant Lutik (1) !

Da dapout vit he voaz eunn toulladik mouezio
E sklabé arc'hant braz enn hostelerio....
Evel ar marmouzien n'en deuz netra da goll
Henvet euz eur c'hi klanv, redek a ra dre holl.

Evel eur marc'h kiger a red hirie gant Job,
E taoulampo warc'hoaz gand Fanch evit he c'hab :
Eunn tol fallagriez enn han lak kalz a stad ;
War ar jalod brein ze, beugeusét, ma zud vad.

(1) An diaoul evchek.

Al lezen , o pet sonj , e deuz eun nerz spontuz ,
Ret eo plegan crak dirag-hi ha fonnuz ;
Pa ve impliet mad ann dud en em gav iac'h ,
Pa ve impliet fall , homp holl tapet er sac'h .

Vid ober lezenno , ha lezenno gret mad
Dibabomb enn hon touez unan a furnez vraz ;
Na re goz na re iaouank , enn eur gir kreiz he-n-hoad
Rag ann den ne dal man pa ve erru re graz ,

Pa c'het d'eur foar benag mar eo vit gwerza
Ec'h et diwar ann dour pe gant saout pe gant moc'h
Ha mar bec'h meo ha dall vit ober ho prena
E kemerset abred eur wiz evid eun oc'h.

Dirag ann dud a blu , alaouret penn-da-benn
Evel dirag ar re eo touz ho chupen :
Askol fall a zivoan e ker vel-war ar mez ,
Diwallet , ma zud vad , diwallet , tudo kez .

Unan anaveann, flöeryus vel ann naplez ;
Hen-nez, o ped sonj mad, a chom enn eur palez ;
Fripon touet, gaouiad, e-tu-hont eo laer
Kap da rei e ine evit triouac'h diner.

He dend a zo du-glaou : debret gand ar c'hlenved :
He deod hag he fri brein ho deuz c'houez ar pec'hed ;
Bez en deuz arc'hant braz ! a vern ! a vern ! a vern !
Laeret diwar hon c'houst, evel ier gant ar lern ! ...

Diwar benn ør plaso, chekon ! gwasa chas bleo !
N'em dorna a reont ken a ziwad ho c'hreo
Spontuz e ho gwelet a blad, a bign, a grap
Evel chas war eur c'had toled enn holligrap.

N'ho deuz ket a amzer evit dibab ho hent
Toiezo ! ze ne mad nemed vit ar zodien !
Pad ma vezò ho dorn enn eur ialch leun a aur
E-sonj gant-he dre lorc'h n'afont biken da baour.

Er bed-man , ho ped sonj , neuz nemet diou lezen
Ar peoc'h a vo gan-ec'h mar d-oc'h enn hini vad :
Ha kaer ho po gwinkal , n'em stourman , n'em asten
Na lempfet gwec'h e-bed ann nerz a zorn ann tad.

E touez ar fransizien , siouaz ! e zo tud dall
A gerz gand plijadur enn hend ar zio fall ;
Distroomp euz Doue , pedomp , breudeur pedomp
Evit pellaad rak-tal ar walen zo war n-omp.

Hò ! Rouantelez Franz ! ho ! ma bro binniget !
Gwad holl ha kastiet , lic'hiet ha blonset ;
Petra ta teuz te gret vid bezan er stad-ze ?
Skuill daëlo , ma Mamm gez , hag holl pedomp Doue ! ...

ADRIEN RAISON DU CLEUZIOU

Kenta a Miz c'huevrer, mil eiz-kant-unnek a tri-uguent.